

Ar sevel-loened e Breizh

Skouer ar sevel-moc'h abaoe 1950

Goulenn diazez : Abalamour da betra e c'haller lavaret eo dibar ar sevel-loened e Breizh ?

Kelc'hiad 4 – 3^e klas – Ar spasoù produiñ hag o c'hemmoù

Ar sevel-loened e Breizh abaoe ar bloavezhioù 1950

Diell 1 E fin an Eil Brezel-bed e oa e Breizh ur bern tiegezhioù bihan, war-dro 200 000. A bep seurt traoù a veze produet, gounit legumaj ha sevel loened liesseurt (un nebeud a saout, moc'h, yer...). Adalek kreiz ar bloavezhioù 1950 e felle d'ar Stad broudañ ur mod nevez a brodufe kalz muioc'h ha marc'hadmat pa ouzer e oa ezhomm magañ ur boblañs niverusoc'h-niverusañ (mare ar « Baby boom » e oa). E Breizh e oa diaes brasaat an tiegezhioù ha neuze e oa bet kroget da sevel loened stank-ha-stank e tier-feurm bras modern, ispisializet war un dra da broduiñ : yer pe moc'h dreist-holl. Dibab gouennoù loened a gresk buan, berniañ al loened e savadurioù


bras hag o magañ gant boued industriel (Sanders da skouer) evit lakaat anezho da devaat buan, setu ar pezh a oa bet lesanvet ar « patrom breizhat ». Evit magañ kement a loened e ranker enporzhiañ soja (OGM a-wechoù) ha maiz, e porzhioù Brest hag an Orient. Louzoù a vez kinniget d'ar beizanted evit na redfe ket kleñvedoù e-touez ar chatal (antibiotikoù da skouer). Gant ar mod askoridik-mañ, anvet « ezdouar », e vez kresket ar produadur en un doare digredapl betek produiñ re zoken, ar pezh a lak ar prizioù da ziskenn. Ezporzhiañ d'ar broioù all zo



↑ Stal sevel-moc'h Betina e Sant-Nolf (56) e 1970

un diskoulm d'an dalc'h-mañ met diaes e teu da vezañ keveziñ gant broioù e-giz Sina pe Brazil.

Hiziv eo arbennikaet 80 % eus tiegezhioù Breizh war ar sevel-loened, produet e vez 14 milion a voc'h bep bloaz, ar pezh a dalvez war-dro 60 % eus ar moc'h produet e Frañs. Brasoc'h-brasañ ha modernoc'h-modernañ eo an tiegezhioù : otomatizet e vez ar produiñ. N'eus ken ezhomm 4 miz evit sevel ur pemoc'h mat da lazhañ.



Diell 3 Ar sevel-moc'h e Breizh (5 dep.) abaoe 1950

Barregezhioù

- Dielfennañ ha kompren un diell
- Ober gant lavarou disheñvel ar c'heografiezh
- En em lec'hiañ er spas : kaout spisverkoù geografiezh



Diell 2 An embregerezh Henaff e Pouldreuzig e 1972

« Ar moc'h e Penn-ar-Bed », abadenn *Breiz o veva* (INA)


Mat da c'houzout !

- 110 miliard a gilioù kig-moc'h a vez produet bep bloaz er bed.
- 25 bloaz eo spi da vevañ ar moc'h, met lazhet e vezont pa vezont war-dro 6 miz.
- Debret e vez gant pep hini eus ar Frañsien war-dro 35 kg a gig-moc'h bep bloaz, 75 % aet d'ober charkuterezh.
- Kavet e vez gelatin moc'h er madigoù, toaz-dent...
- Prouet eo bet gant skiantourien eo ar moc'h loened speredekañ an ti-feurm, speredekoc'h evit chas zoken, ur memor mat o deus.
- 3 700 milion a donennoù : sed aze ar c'hementad a voued a zo ezhomm evit magañ kement-se a voc'h er bed.
- Div relijion a zifenn da zebriñ kig-moc'h : ar yuzevieg hag an islam.

Ar moc'h e Breizh : 35 000 den o labourat



Diell 4 Kartenn an ekonomiezh e Breizh



Diell 5 Ar micherioù liammet ouzh ar sevel-moc'h

Ur mod produiñ abeget



Diell 6 Daou sell war ar sevel-moc'h

- « Une vie de cochon », film bet savet gant Olivia Mokiejewski (*Infrarouge*, France 2), etre 6'50" ha 20'00"
- Pennad-kaoz gant Guillaume Roue, saver-moc'h (Brezhoweb)

Diell 7 Foñs bae Douarnenez goloet gant ar bezhin glas

Distroet int ! A-raok ar vakañserien zoken, met n'eo ket deuet mat o distro : ar bezhin glas. Abaoe sizhuniou e weler anezho war traezhenn ar Ri e Douarnenez, unan eus traezhenoù brudetañ kêr. Un taol fall eo evit tud ar vro, gwelet o zraezhenn istorel goloet gant bezhin glas. An Ti-kêr en doa embannet un diferad evit difenn ouzh an dud kouronkañ en abeg d'ar yec'hed. Diwar atiz ar Prefeti hag Ajañs rannvroel ar yec'hed e oa bet kemeret an diviz-se. Evit ar bloaz 2019 en e bezh da nebeutañ.

Dibaoe daou zevezh eo en em ledet ar saotradur e bae Douarnenez, traezhenoù Ploudiern, Ploeven ha Plonevez-Porzhe zo gronnet gant ar bezhin glas. Gant tommder an amzer e seblant bezañ kreñvaet lanvad ar bezhin glas. N'eo ket gwall bennfollet an dilennidi evit ar mare met ma kendalc'h evel-se e vo ur gudenn evit skeudenn ar vro hag an touristerezh. Ar memes kudenn a



gaver un tammig dre-holl war aodoù Breizh siwazh, evel e bae Sant-Brieg pe aod bro Fouenant. An dalc'h brasañ a chom eo ne reer netra evit disaotrañ

pe rediañ an tiez-feurm da cheñch evit paouez. Gwashoc'h c'hoazh, dec'h en doa aotreet prefed Penn-ar-Bed e vefe astennet un ti-feurm bras en argrec'h d'an Neved. Diouzh un tu e redi an dilennidi lec'hel da gemer divizoù evel serriñ un draezhenn evit abegoù yec'hed ha diouzh un tu all e aotre un ti-feurm saotrus da vrasaat. N'eo ket poellek tamm ebet evel-just hag ur wech c'hoazh e weler peseurt pouez en deus ur prefed, ur pouez ponneroc'h eget tud dilennet, ar pezh n'eo ket reizh. Dourioù ha Stêrioù Breizh he deus divizet mont betek al lez-varn evit mont a-enep an diviz-se.

Diwar Maxime Touzé,
Pobl Vreizh,
d'an 28 a viz Even 2019

Klaskomp

Pajenn 1

1. Diell 1 : Petra a dalvez ur mod produiñ ezdouar ?
2. Diell 3 : Keñveriañ an niver a voc'h savet e Breizh e 1950 hag e 2018.
3. Diell 1, 2 ha 3 : Renabliñ perzhioù mat ar mod produiñ ezdouar.

Pajenn 2

4. Diell 4 : E peseurt takadoù e vez savet ar muiañ a voc'h e Breizh ?
5. Diell 5 : Livañ e gwer ar gennad kentañ, e ruz an eil gennad hag e melen an trede gennad.

Pajenn 3

6. Diell 6 : Renabliñ ar pezh a zo diaes da vevañ evit ar moc'h pa vez produet mod ezdouar.
7. Diell 7 : Peseurt liamm zo etre ar sevel-loened stank hag ar bezhin glas ?

Pajenn 4

8. Diell 8 : Perak e soñj deoc'h en deus divizet Virgile sevel moc'h mod bio ?
9. Diell 9 : Kavout er grafik div elfenn eus ar sevel-moc'h bio e Breizh.

Ha doareoù all zo da sevel moc'h?



Diell 8

Selaouomp Virgile Bleunven, ur saver-moc'h yaouank


Abadenn *An Taol Lagad*, France 3 Breizh, d'ar 6 a viz Ebrel 2018



Diell 9

An niver a diegezhioù e Breizh

Niver a diegezhioù o sevel moc'h e Breizh (muioc'h evit 100 pemoc'h)



Evit mont pelloc'h

- Labourat an douar mod-all, abadenn *Bec'h dezhi* war BREZHOWEB, 2016
- *L'enfer vert des Bretons*, film bet savet gant Mathurin PESCHET, 2012
- *Algues vertes, l'histoire interdite*, bannenn-dreset bet savet gant Inès LÉRAUD ha Pierre-Gilles VAN HOVE, Delcourt/La Revue dessinée, 2017

Orin an titourou

- <http://draaf.bretagne.agriculture.gouv.fr>
- <http://www.bretagne.synagri.com>
- <https://www.agro-bio-bretagne.org/espace-bio/les-chiffres-de-la-bio>
- Jean-Paul DIRY, *L'Industrialisation de l'élevage en France. Économie et géographie des filières avicoles et porcines*, Éditions Ophrys, 1985
- Pierre DAUCÉ, Yves LÉON, *L'Évolution de l'agriculture bretonne depuis 1850*, Sciences Agronomiques Rennes, 1982, 96 p.



© Erwan ar Berr & TES 2020 – www.tes.bzh

Kredoù ar skeudennoù : p. 1 : Dastumadoù mirdi Breizh hag ekomirdi Bro-Roazhon – p. 2 : kartenn gant Mikael Bodlore-Penlaez, Geobreizh.bzh.2020 – p. 3 : poltred gant H. Peaudecerf – p. 4 : poltridi gant H. Peaudecerf; tresadenn gant Nono (Joël Auvin).